

E BREZHONEG

**Chantier bras e Sant Riwal**

Oc'h ober ur blasenn nevez emeur e Sant Riwal. Ur skipailh masone-rien a zo bremañ o renkañ pavezioù nevez dirak dor ar skol. Klevet hon eus anezho o kaozeal brezhoneg. Setu omp bet gant ar magneto-fon oc'h ober goulennoù diganto. Digant Marc Guegan hon eus bet respontoù.

Setu

*Raphaël :*

- \_ Da bet eur e vez kroget gant al labour ?
- \_ Da seizh eur.
- \_ Da bet eur e vez diskroget ?
- \_ Da c'hwec'h eur.
- \_ Da belec'h ez eoc'h da zebriñ lein ?
- \_ Da di Solen e fas d'ar skol aze.

*Thomas :*

- \_ Pet a dud a zo o labourat e-barzh ar skipailh ?
- \_ Nav a zo.

*Dorian :*

- \_ Mont a rit d'ar gêr diouzh an noz ?
- \_ Bep noz ez an d'ar gêr.
- \_ Pet kilometr a zo ?
- \_ Evit mont da Bleiber-Krist, tregont ha da c'houde pemzek c'hoazh.

*Marion :*

- \_ Pelec'h 'p eus desket ar vicher ?
- \_ E ti 'n Helary. Desket 'm eus gant tud all.

*Maela :*

- \_ Peseurt labour ' vez graet ar muiañ ganeoc'h ?
- \_ « Des bordures », n'ouzon ket penaos 'vez lâret an dra-se e brezhoneg.

*Laurent :*

- \_ Pe anv oc'h ?
- \_ Marc Guegan.
- \_ Pelec'h emaoch o chom ?
- \_ E Plougras, e-kichen Gwerliskin.

*Fabien :*

- \_ Da belec'h ez eoc'h da c'houde ?
- \_ Da Garaez
- \_ Daoust hag e vo ur chantier bras e Karaes ?
- \_ Ya sur, e Karaes e vo graet labourioù e-barzh ar ru vras. Met labourer e vez ivez evit an dud evit ober alezioù war dro an tiez.

***Si tu ne comprends pas, demande à tes parents, tes grands-parents ou tes voisins de te traduire l'interview !***



Chantier an ti-kêr da gentañ  
Le chantier de la Mairie d'abord



Chantier ar blasenn da c'houde  
Le chantier de la place ensuite



Mark Gwegan war e labour  
Marc Guégan au travail



**Ar brezel 1914 \_ 1918**

Kalz levrioù a zo bet skrivet gant Roger Laouenan, kazetenner en Telegram, diwar-benn buhez ar soudarded e-pad ar brezel pevarzek. Klevet hon eus anezhañ o kaozeal e-barzh an tele diwar-benn « Les poilus dans la grande guerre ». Diaes eo bet evit ar soudarded er fezier (dans les tranchées) e-pad ar brezel etre ar Frañs hag an Alamagn. Dre al lizhiri bet skrivet gant ar soudarded d'o familh a zo bet tu dezhañ gouzout traoù diwar-benn ar vuhez en trancheoù.